



Daet eo geneomp !

Goude pemp blezad labour he deus Kerlenn Sten Kidna lakaet e gwerzh ur benveg ha n'en deus ket e bar e Breizh, na mamp e Bro-C'hall : 15 tem diàr ar vuhez a-vremañ, 3 live da bep hani, da lâret eo 45 video ha 88 munutenn get lârerion a Vro-Gwened ha poelladennoù e-leizh da heul.

N'eo ket bet savet evit tud a zo komañset nevez zo da zeskiñ ar brezhoneg, kentoc'h evit ar re o deus tizhet al live A2 (daou

vlezad skol-noz pe tri miziad staj d'an daoulamm) da vihanañ, a pa vehent o-unan dirak ur skramm pe en ur strollad get ur c'helennour. Ar pal a vo evite gwellaat ar c'hompren dre glevet, a-drugarez da 7 sort poelladennoù evit pep video. Selaou pizh, kompren an danvez ha derc'hel soñj a vo labourer er mod-se.

Razh ar vrezhonegerion a c'hello tenniñ splot ag ar bladenn-mañ, da gustumiñ o divskouarn doc'h ar brezhoneg dre vras peotramant da dostaat o farlant dezhe o-unan doc'h ar livoù yezh a Vro Gwened implijet get al lârerion. Daremprediñ ur yezh c'hwennet, pinvidik a

ro an DVD an tu d'ober ivez ha kement-se en ur c'hoari. Plijadur neuze d'ar familh a-bezh !

Labour ur skipailh

Kaset eo bet da benn ar vrav a oberenn-mañ get ur bare, enni pevar ezel a Gerlenn Sten Kidna : Daniel Carré, Patrick Dréan, David ar Rouz ha Ronan Stéphan. Tud a vicher o deus kemeret perzh er raktres ha razh, en o mesk Olivier Berson, animatour ar Gerlenn, evit an tresadennoù hag Anne-Maëlle ar Rouz evit ar stlenn, met ivez kalzig a dud a youl vat daet da enrolliñ ar videoioù pe da sikour àr an dra-mañ-tra. Skoazelloù

Rannvro Breizh, Kuzul-Meur ar Morbihan hag an Ao. Michel Grall a oa bet resevet, koulz ha harp ar skolioù-meur ha hini an aozadurioù stummiñ.

Muioc'h a ditouroù, peurgetket videoioù hag a ziskouez penaos eh a ar benveg en-dro ha petra zo a-barzh, a gavoc'h àr lec'hienn ar Gerlenn :
http://www.kerlenn-sten-kidna.com/?page_id=1854.

Geti e vez gwerzhet ar produ da 20 EUR ha profet ar frejoù kas evit ar poent. Gallout a ra bout kavet pe goulennet ivez en holl stalioù-levrioù pourvezet get Coop Breizh.
<http://www.kerlenn-sten-kidna.com/>



Frouezh 5 bloavezh labour